

MARJANIK

Ton : *La Mariole.*

DISKAN :

Setu aze eur plac'h hag a zo ken koantik !
Ar botred yaouank zigouez da guel anezi,
A zo gonet gati.

I

Marjanik eo e hano,
Deoc'h me zo sùr a blijo ;
Neus nikun al ebars ar vro
Hag a zo ken brao.
E guenet a zo ive
Dreist e hano marteze !
E kement feson zo e blij dan oll
Ha gati e ment foll !

II

Ret e ve deoc'h e guellet
War an dachen ken fichet,
Etouez kement all a veriet
Dei ma ar boket,
Pintet vel eur verc'hoden
E diou chod zo rus ha guen
Daoulagad c'hlas zo bars ne fen
E bleo a zo melen.

III

Mousc'hoarzin a ra eb mar ;
Kleou rer an dud ho lavar,
Vit galoupad tout an douar
Ve ket kaët e far
Da blijout ha da vragal
Da bresanti, da zansal
Ha memes bars tout kement feson al
Ne mai ket fal...

IV

Ato e raï plijadur,
Deus an draze e momp sùr,
Dan dud oll viti vo fur.
Pebeus kraouadur !
Goude nomp e hanvezet
E vo bepred nor spered !
Eirus vemp ho sonjal eni bepred
Hor bues hed a hed.

François BENOIT.